

ESPACE
LEURENN

**GLEN
MOR**

SAISON
CULTURELLE
2026 - 2027

KOULZAD
SEVENADUREL
2026 - 2027

CARHAIX
KARAEZ



SAMEDI 12 SEPTEMBRE
SADORN 12 A VIZ GWENGOLO

ITRIKA #2

MO'KALAMITY & THE WIZARDS,
FAYA PYD & COZIK, DEEP & HIGH,
KHOE-WA, MOUK, SHLAG DIVISION,
MAÏLYS PRINCÉ & BRIEG GUERVENO

À PARTIR DE 16H30 / ADALEK 4E30

AMPHI / AÑFI



©Alexandre Desjardins



MUSIQUES ACTUELLES

L'association Itrika porte une conviction forte : les langues minoritaires sont vivantes, actuelles, capables de rassembler, de danser, de rapper, de vibrer. Au cœur de cet engagement, la défense et la transmission de la langue bretonne s'imposent comme une évidence. Les langues minorisées peuvent parler au présent, à toutes les générations, et trouver leur place sur les scènes d'aujourd'hui. Itrika s'est donné pour mission de réinventer la manière dont les langues et cultures s'expriment dans le paysage artistique, en créant des espaces où traditions et modernité dialoguent librement.

Le festival qu'elle propose à l'Espace Glenmor s'inscrit pleinement dans cette démarche : une soirée musicale ouverte, métissée, où les identités se croisent et se répondent. Pour cette deuxième édition, Itrika réunit des artistes dont les univers reflètent la diversité des voix contemporaines : le reggae engagé et lumineux de Mo'Kalamity & The Wizards ; le folk électrique de Mouk ; Deep & High, duo vocal qui explore la voix comme instrument total, entre beatbox, polyphonies et performance ; Faya Pyd & Cozik, rencontre hip-hop où les langues et les récits urbains prennent toute leur place ; Khoe-Wa, voyage dub introspectif porté par des basses profondes et des textures électroniques ; Shlag Division, rock brut et sans compromis, animé par une énergie de scène explosive.

En ouverture du festival, Maïlys Princé et Brieg Guerveno proposeront une rencontre-conférence suivie d'un concert - gratuit et ouvert à toutes et à tous - autour du thème « langues et musiques de Bretagne à l'ère du numérique ».

Coréalisation Espace
Glenmor, association Itrika

Rakwerzh HELLOASSO : 15 €
10 € - 25 bloaz

WAR AL LEC'H : 20 €
-12 VLOAZ : DIGOUST

Prévente sur HELLOASSO : 15 €
10 € pour les - de 25 ans

SUR PLACE : 20 €
MOINS DE 12 ANS : GRATUIT

SONEREZH A VREMAÑ

Kendrec'h et da vat eo ar gevredigezh Itrika : bev eo ar yezhoù minorel, gwriennet int en amzer vremañ, gante e c'haller bodañ an dud ha lakaat anezhe da zañsal, da ganañ rap ha da fraoñval gant ar fromoù. Diazezet eo an engouestl-se war ar stourm evit difenn ha treuzkas ar brezhoneg, splann eo ken ez eo. Ar yezhoù minorelaet zo yezhoù a vremañ hag a vez komzet gant an holl, kozh ha yaouank, hag ur plas o deus war al leurennoù hiziv an deiz. Itrika a glask skoulmañ liammoù en ur mod frank etre an hengoun hag ar modernelezh abalamour da adijinañ ar mod ma implijer ar yezhoù hag ar sevenadurioù e bed an arz.

Ar festival a aozont el Leurenn Glenmor a ya war an hent-se da vat : un nozvezh sonerezh digor, kemmesket, ma lakaer an identelezhioù da gejañ an eil re gant ar re all. Itrika, evit an eil taol-mañ, he deus bodet ar zourien pep a ved disheñvel dezhe hag a laka liesseurted ar mouezhioù a vremañ war-wel : ar reggae gant Mo'Kalamity & The Wizards en ur mod engouestlet ha lugernus ; ar folk nerzhus gant Mouk ; an div vouezh en daouad Deep & High a ya d'ober ur seurt benveg sonerezh hollek, etre beatbox, liesvouezhioù ha taol arz ; Faya Pyd & Cozik a ginnig un emgav mod hip-hop ma roont o flas d'ar yezhoù ha d'an istorioù a c'hoarvez e kêr ; Khoe-Wa, evit ur veaj diabarzh dre an dub gant sonioù don hag ur stil elektronek ; Shlag Division, gant ur sonerezh rock da vat hag a zo kaset war al leurenn gant energiezh ha birvilh.

Evit digeriñ ar festival e vo un emgav-prezegenn gant Maïlys Princé ha Brieg Guerveno war an tem « yezhoù ha stiloù sonerezh e Breizh da vare an niverel » hag ur sonadeg da-c'houde - digoust ha digor d'an holl.

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor hag ar Gevredigezh Itrika

SAMEDI 19 SEPTEMBRE
SADORN 19 A VIZ GWENGOLO

KIDU'FEST

LES RAMONEURS DE MENHIR, RENE
BINAME, FIOUL BAZAR, NOUS,
LONDON QUARKS, VOLTAIRINE

A PARTIR DE 18H00 / ADALEK 6E00
SALLE D'EXPOSITION / SAL-DISKOUEZADEGOÙ



MUSIQUES PUNK ET ALTERNATIVES

Le festival Kidu'fest débarque pour sa toute première édition à l'Espace Glenmor. Une journée où l'énergie punk, la créativité et l'expression populaire se rencontrent.

À partir de 18 h, Les Ramoneurs de Menhirs, René Binamé, Fioul Bazar, Nous, London Quarks et Voltairine feront vibrer la scène pour un festival jeune, libre et intensément vivant. Une première édition qui promet déjà d'être mémorable.

L'événement a pour but de soutenir Diwan et Div Yezh, des initiatives engagées dans la promotion des langues et cultures bretonnes.

Organisation : Association expression populaire

Prévente sur HELLOASSO : 12 €
SUR PLACE: 15 €

SONEREZHIOÙ PUNK HAG UNDERGROUND

Ar festival Kidu'fest a vo aozet evit an taol kentañ el Leurenn Glenmor. En devezh-se e vo lakaet an energiezh punk da gejañ gant ar c'hrouñ hag ar sevenadur poblek.

Hag adalek 6e e vo lakaet leurenn ar festival yaouank, frank ha bev-mañ da fraoñval gant Les Ramoneurs de Menhirs, René Binamé, Fioul Bazar, Nous, London Quarks ha Voltairine. An taol kentañ-mañ a vo dalc'het soñj anezhañ a-dra-sur.

Aozet eo ar festival abalamour da sikour Diwan, Div Yezh hag an oberoù kaset da benn evit brudañ ar brezhoneg, ar gallaoueg ha sevenadurioù Breizh.


Aozet gant : Ar gevredigezh Expression populaire

Rakwerzh HELLOASSO : 12 €
WAR AL LEC'H : 15 €

SAMEDI 3 OCTOBRE
SADORN 3 A VIZ HERE

DICK ANNEGARN

20H30 / 8E30
AMPHI / ANFI



CHANSONS AGRICOLES

Depuis 50 ans, Dick Annegarn chante la terre et la nature avec tendresse et humour : Sacré géranium, L'Orage, Quelle belle vallée... Installé dans une ferme au pied des Pyrénées, l'auteur-compositeur-interprète crée des chansons simples et émouvantes, où se mêlent poésie, humour et engagement pour le vivant.

Guitariste émérite, accompagné d'harmonica, de percussions et de chants a cappella, il propose un univers musical riche et sensible, où chaque note respire comme le vent dans les arbres.

Le public est invité à apporter plantes, fleurs ou arbustes pour décorer la scène, puis à les rapporter chez soi à la fin du concert, un geste collectif et poétique qui prolonge la magie de la musique et de la nature.

Dick Annegarn : chant, guitare

Coréalisation Espace Glenmor, La Grande Boutique

TE: 8 € / TA: 13 €
TR: 15 € / TP: 18 €

KANAOUENNOÙ LABOUR-DOUAR

50 vloaz zo e vez kanet an douar hag an natur gant Dick Annegarn en ur mod tener ha fentus : Sacré géranium, L'Orage, Quelle belle vallée... Emañ ar skrivagner-sonaozer-kaner o chom en ur feurm e-harz ar Pireneoù, lec'h ma vez o krouiñ kanaouennoù eeun ha fromus gant barzhoniezh, fent hag un engouestl evit an traoù bev.

Gitarour ampart eo ha gant harmonika, binvioù tos ha kan a capella da-heul e ro deomp da selaou ur bed sonerezh puilh ha tener, ma'z a pep notenn d'ober evel ur red-avel er gwez.

An arvesterien a fell dezhe a c'hall degas plant, bleunioù ha brousgwez gante da ginklañ al leurenn ha kas anezho d'ar gêr goude ar sonadeg. Ur jestr stroll ha barzhoniell e vo evit lakaat kaereded ar sonerezh hag an natur da badout un tamm pelloc'h.

Dick Annegarn : kan, gitar

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor hag Ar Stal Vras

PB: 8 € / PK: 13 €
PD: 15 € / PL: 18 €

DIMANCHE 4 OCTOBRE
SUL 4 A VIZ HERE

TRAIN-TRAIN-BLUES CIE. LES 3 VALOCHES

11H00 & 15H00 / 11E00 & 3E00
SALLE D'EXPOSITION / SAL-DISKOUEZADEGOÙ



THÉÂTRE, MUSIQUE, MAGIE NOUVELLE

Accueilli sur un quai de gare improvisé, vous serez guidé par "Jean-Luc Comment, contrôleur chauffeur" du Train-Train-Blues, pour prendre place à bord. Dans un train bleu, vous découvrirez l'histoire d'un voyage et de la femme qui l'accomplit. Dans les fenêtres, les paysages défilent comme des tableaux mouvants et révèlent des souvenirs d'enfance, des anecdotes liées à la famille. Dans un retour aux sources, elle ouvre ses bagages, pour redécouvrir la voix de son père, la peau de sa mère... et tout ce qui l'a construite. Un spectacle immersif qui invite le spectateur à partir avec les comédiens à bord d'un train magique qui nous emmène "Au bout du bout... aux origines... à notre enfance".

Comédiens : Anne Jourdain, Adrien Desthomas
Ecriture : Anne Jourdain
Mise en scène et direction des acteurs : Macha Léon

Coréalisation Espace Glenmor, Échanges & Cie.
À partir de 3 ans.
Durée : 40 min

TU : 1 €
Billetterie en vente
sur place uniquement

C'HOARIVA, SONEREZH, HUDOURIEZH MOD NEVEZ

Degemeret e vioc'h war kae ur gar aozet war ar prim ha kaset betek ho plas gant "Jean-Luc Comment, kontrollor ha bleiner" e-barzh an Train-Train-Blues. E-barzh an tren glas-se e c'halloc'h selaou istor ur vaouez hag ar veaj graet ganti. Dre ar prenester e weloc'h dremm ar c'hornioù-bro o tremen, evel taolennoù fiñv-difiñv hag a lakay soñjoù eus ar bugaleaj ha degouezhioù bihan diwar-benn ar familh da zont war-wel. Digeriñ a ra he malizennoù evit distreiñ d'he gwrizioù, adkavout mouezh he zad, santout kroc'hen he mamm... ha kement tra en deus stummet anezhi. An arvest-mañ a laka an arvesterien da splujañ da vat e-barzh un istor, asambles gant komedianed ha komedianezed, e bourzh un tren hud hag a gas ac'hanomp war-zu "Ar penn-kentañ-tout... an orinoù... hor bugaleaj".

Komedianed : Anne Jourdain, Adrien Desthomas
Skrivet gant : Anne Jourdain
Leurennañ ha ren an aktored : Macha Léon

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor, Échanges & Cie.
Adalek 3 bloaz.
Pad : 40 min


www.les3valoches.com

PU : 1 €
BILHEDOÙ E GWERZH
WAR AL LEC'H HEPKEN

**SAMEDI 24
& DIMANCHE 25 OCTOBRE
SADORN 24 & SUL 25 A VIZ HERE**

37^{ÈME} FESTIVAL DU LIVRE EN BRETAGNE 37^{VET} GOUEL AL LEVRIOÙ E BREIZH

10H00-19H00 / 10E00-7E00



Rendez-vous incontournable pour celles et ceux qui aiment les livres, le Festival du livre de Carhaix est un événement unique en Bretagne. Il permet en effet, le temps d'un week-end, de rassembler une large majorité des maisons d'édition du pays, (environ une centaine) qu'elles éditent en langue française ou en breton. Près de 300 auteurs, des plus connus aux anonymes, sont présents sur les différents stands.

Chaque année, des éditeurs callent la sortie de leurs principaux ouvrages sur la date du festival faisant de Carhaix le lieu de la rentrée littéraire en Bretagne.

Le festival aura pour thème cette année le sport en Bretagne et sera présidé par Georges Cadiou, journaliste et écrivain, Grand reporter à Radio France jusqu'en 2010, connu pour avoir commenté de nombreux événements sportifs.

Comme chaque année, ce rendez-vous proposera des débats, des tables rondes, des expos, des films... des rencontres toujours riches d'enseignements avec les éditeurs, des moments inoubliables autour du livre et de la lecture. Un espace ludique pour les enfants est proposé aux parents. Il est possible de se restaurer sur place.

Bref, deux jours non-stop dans l'univers des livres édités en Bretagne. Une découverte et une surprise pour beaucoup face à la diversité et à la richesse éditoriale de notre pays.

Organisation : Centre culturel breton Egin.

GRATUIT

www.festivaldulivre-carhaix.bzh

Gouel al levrioù e Breizh zo deuet da vezañ, a-hed ar bloavezhioù, un emgav ha ne c'haller ket c'hwitañ evit ar re a blij al levrioù dezhe. Rak gallout a reer degemer ennañ, e-pad un dibenn-sizhun, ar braz eus an tiez-embann er vro (ur c'hant bennak anezhe), pe ec'h embannfent levrioù gallek pe levrioù brezhonek. Tost da 300 skrivagner, eus ar re anavezet ar muiañ betek ar re dianav, a vo ivez er standoù a bep seurt.

Bep bloaz e vez embannerien oc'h ober e doare ma teuy o oberennoù pennañ er-maez da-geñver ar gouel a laka Karaez da vezañ al lec'h ma tegouezh mare al levrioù e Breizh.

Ar bloaz-mañ e vo gouestlet ar festival d'ar sport e Breizh ha prezidet e vo gant Georges Kadioù, kazetenner, skrivagner, kelaouer meur e Radio Frañs betek 2010, anavezet-mat pa oa bet displeger sport.

Evel bep bloaz e vo kaozeadennoù, taolioù-krenn, diskouezadegoù, filmoù... emgavioù gant ar skrivagnerien, mareoù diankounac'haus ma vez desket kalz a draoù diwar-benn al levrioù hag al lenn. Ul lec'h c'hoarioù a vo kinniget evit ar vugale. Debriñ war al lec'h a c'haller ober.

E berr gomzoù, daou zevezh dibaouez e bed al levrioù embannet e Breizh. Digarez d'ober anaoudegezh gant traoù a-leizh ha da lakaat kalz a dud da vezañ souezhet dirak al levrioù liesseurt ha puilh a vez embannet en hor bro.

Aozet gant : Kreizenn sevenadurel vreizhat Egin.

DIGOUST

VENDREDI 6 NOVEMBRE
 GWENER 6 A VIZ DU

MATTHIEU NINA : EN BAS DE L'ÉCHELLE

20H30 / 8E30

AMPHI / AÑFI



www.facebook.com/matthieu.nina

DIGOUST EVIT
 AR GOUMANANTERIEN

PD: 15 € / PL: 18 €

HUMOUR

À 10 ans, Matthieu est tombé d'une échelle et est devenu handicapé. 25 ans plus tard, il monte sur scène. Ça a pris du temps mais c'est parce qu'il n'y avait pas de rampe d'accès.

En bas de l'échelle est le premier spectacle solo de Matthieu Nina, écrit avec la complicité de Pierre-Emmanuel Barré et Arsen. Le ton est assumé : humour noir, autodérision, et une volonté d'aller là où « on n'oserait pas ».

Matthieu Nina, finaliste de la 19^e saison de La France a un incroyable talent, raconte son parcours sans filtre. Il évoque les galères, la persévérance nécessaire pour monter sur scène, et transforme ses expériences difficiles en un terrain de jeu comique.

Chaque soir, il s'attaque à ce qui fait peur, à ce qui fait mal, et réussit le pari de faire rire dans l'espace même de la douleur.

À partir de 14 ans.

Durée : 1h15

GRATUIT POUR
 LES ABONNÉS

TR: 15 € / TP: 18 €

FENT

Pa oa 10 vloaz e oa koezheth Matthieu diwar ur skeul ha nammet diwar-se. 25 bloaz goude ez a war al leurenn. Hir eo bet abalamour ma ne oa ket krapenn ebet evit sikour anezhañ da bignat.

En bas de l'échelle eo anv an arvest solo kentañ gant Matthieu Nina, a zo bet skrivet gant skoazell Pierre-Emmanuel Barré hag Arsen. Sammañ a ra ton e gomzoù : fent du, emc'hoaperezh, ar youl da gomz diwar-benn an traoù ha « ne gredfed ket lavaret ».

Matthieu Nina, bet e gourfenn an 19^{vet} koulzad eus La France a un incroyable talent; a gont ar pezh en deus bevet en ur mod didro. Komz a ra eus ar mareoù diaes hag eus ar pennek m'en deus ranket bezañ evit gallout pignat war ul leurenn ha lakaat ar reuziadoù-se en e vuhez da vezañ un danvez fentus.

Bemnoz e laka ar gaoz war an traoù a ra aon, an traoù a ra poan, hag erfin e teu a-benn da lakaat an dud da c'hoarzhin lec'h m'emañ ar poanioù, dres.

Adalek 14 vloaz.

Pad : 1e15

**DIMANCHE 8 NOVEMBRE
SUL 8 A VIZ DU**

ASAMBLES

**CERCLES CELTIQUES
DU CENTRE-BRETAGNE**

**KELC'HIOÙ KELTIEK
KREIZ-BREIZH**

17H00 / 5E00

AMPHI / AÑFI



© anne lescouet



© Atao Prod

DANSES BRETONNES

Asambles, c'est la rencontre sur scène des trois cercles celtiques du Poher.

Tous trois créés après-guerre, ils font partie des plus anciens groupes de Bretagne. Sans discontinuer depuis 1947, les cercles celtiques de Carhaix, de Rostrenen et de Spézet œuvrent pour la promotion du riche patrimoine culturel du Centre-Bretagne dans les fêtes et festivals d'ici et d'ailleurs. Attachés au respect des traditions de leur terroir, ils transmettent génération après génération, au travers de créations chorégraphiques vivantes et innovantes, la richesse des danses et des costumes traditionnels.

Les groupes du Poher participent régulièrement au Championnat National de Danse Bretonne dans lequel ils sont bien connus des podiums.

Ce rassemblement est aussi une belle entrée en matière pour ces cercles qui ont fêté ou fêteront bientôt leur 80 ans.

Asambles, le Poher danse ensemble. Gavotte !

Tout public

Durée : 3h

Coréalisation Espace Glenmor, Cercle Brug Ar Menez

GRATUIT

Sur réservation auprès des cercles celtiques pour les familles des danseurs et à l'Espace Glenmor pour le tout public

DAÑSOÙ BREIZHEK

Asambles, sed aze tri c'helc'h keltiek eus ar Poc'hêr o kejañ war al leurenn.

Krouet e oant bet o-zri goude ar brezel. E-touez ar strolladoù koshañ e Breizh emaint. Kelc'hioù keltiek Karaez, Rostrenn ha Speied a labour dizehan abaoe 1947 evit brudañ glad sevenadurel puih Kreiz-Breizh er gouelioù hag er festivalioù amañ hag e lec'h all. O zra eo doujañ hengounioù o zerouer, treuzkas a reont, a remziad da remziad, gant krouidigezhioù bev ha nevezus, puihded an dañsoù hag an dilhad hengounel.

Kemeret e vez perzh ingal gant strolladoù ar Poc'hêr e Kampionad Broadel Dañsoù Breizh ma'z int anavezet mat war al leurennoù.

Ur vodadenn gaer eo gant ar c'helc'hioù-se, a zo tremenet pe a dremenno a-raok pell en tu all da 80 vloaz.

Asambles, ar Poc'hêr a zañs asambles. Gavotenn !

Evit an holl

Pad : 3e

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor hag ar c'helc'h Brug Ar Menez


DIGOUST

Dav eo da familhoù an dañsourien hag an dañsorezed mirout o flas digant an teir c'helc'h keltiek, hag el Leurenn Glenmor evit an dud all.

DIMANCHE 15 NOVEMBRE
SUL 15 A VIZ DU

DU CÔTÉ DE CHEZ SOÏG

17H00 / 5E00
AMPHI / ANFI



HOMMAGE MUSICAL À SOÏG SIBÉRIL

Du côté de chez Soïg rend hommage à Soïg Sibéril, figure essentielle de la guitare bretonne et acteur incontournable de la scène musicale depuis plus de quarante ans. Le spectacle réunit les musiciens qui ont partagé sa route, ses collaborations et ses amitiés artistiques.

À travers une succession de pièces emblématiques et de créations, ce projet dresse un portrait musical collectif de Soïg : son style, ses influences, son rôle déterminant dans l'évolution de la musique bretonne contemporaine. Chacun y apporte sa propre histoire, révélant l'empreinte profonde laissée par son jeu et sa personnalité.

Avec : Etienne Grandjean, Nolwenn Korbell, Ronan Le Bars, Dan Ar Braz, Patrice Marzin, Pat O'May, Jean-Charles Guichen, Jean-Michel Veillon, Jamie McMenemy, Alain Genty, Patrick Molard, Karl Gouriou, Erwan Moal, Thalie, Lors Jouin, Hervé Bellec, Alain Goutal, Éric Legret.

Tout public

Durée : 1h30

Coréalisation Espace Glenmor, Du côté de chez Soïg

TR : 10 € / TP : 15 €
- 7 ANS : GRATUIT
Billetterie en vente
sur Helloasso

ENORIÑ SOÏG SIBERIL GANT AR SONEREZH

Du côté de chez Soïg zo un abadenn evit enoriñ Soïg Siberil a oa ur gitarour pouezus-bras e bed ar sonerezh mod Breizh hag e bed ar sonerezh dre-vras abaoe ouzhpenn daou-ugent vloaz. Un arvest eo gant an dud o deus sonet, labouret ha skoulmet liammoù mignoniezh gantañ gras d'an arz.

Er sonadeg-mañ e kinniger ur poltred eus Soïg, dre ar sonerezh hag en ur mod stroll, dre un heuliad pezhioù sonerezh arouezius ha krouidigezhioù : e stil, ar pezh en doa levezonet anezhañ, ar roll meur en doa bet e-barzh emdroadur ar sonerezh breizhek a vremañ. Degas a ra an arzoerien pep a istor evit reiñ da welet ar merkoù don en doa laosket Soïg warne gant e stil, e sonerezh hag e bersonelezh.

Gant : Etienne Grandjean, Nolwenn Korbell, Ronan ar Barzh, Dan ar Braz, Patrice Marzhin, Pat O'May, Jean-Charles Guichen, Jean-Michel Veillon, Jamie McMenemy, Alain Genty, Patrick Molard, Karl Gouriou, Erwan Moal, Thalie, Lors Jouin, Hervé Beleg, Alain Goutal, Éric Legret.

Evit an holl

Pad : 1e30

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor
ha Du côté de chez Soïg

PD : 10 € / PL : 15 €
- 7 VLOAZ : DIGOUST
Bilhedoù e gwerzh
e Helloasso

VENDREDI 20 NOVEMBRE
GWENER 20 A VIZ DU

BOOGIE + KENDO TEMPLE

21H00 / 9E00
KLUB / KLUB



Boogie©Tony Pepper scaled

RAP

Que ce soit sur des grosses basses ou des remixes des tubes des années 2000, Boogie se démarque par un flow ultra efficace qui vous fera forcément bouger la tête. Avec déjà trois projets en deux ans, le « jeune rookie » vient fouler la scène avec un objectif clair : donner la preuve que ce début de carrière est plus que prometteur, tout en le célébrant.

Fondé en 2022, KENDO TEMPLE est un collectif indépendant et intergénérationnel qui fait vibrer la culture Hip-Hop sous toutes ses formes. Leur style propose un mélange de BoomBap et de sonorités actuelles, enrichi par des textes ciselés.

Tout public
Coréalisation Espace Glenmor, CLAJ

TU : 8 €
Concerts debout

www.instagram.com/boogiesku

RAP

Dibar eo Boogie gant e flow efedus-kenañ a ray deoc'h dañsal, ha pa vefe gant sonioù bout don pe adveskadennoù diwar ar c'hanaouennoù anavezet ar muiañ eus ar bloavezhioù 2000. Gant tri raktres dindan daou vloaz en deus lakaet ar « rookie yaouank » e dreid war al leurennoù gant ur pal sklaer : prouiñ emañ o kregiñ e-barzh gant berzh ha lidañ al lañs-se.

KENDO TEMPLE, krouet e 2022, zo ur c'henstroll emren evit meur a remziad tud hag a laka ar sevenadur Hip-Hop da vevañ e kement doare a vefe. Diazezet eo o stil war ur meskaj BoomBap ha sonioù a vremañ gant testennoù savet pizh.

Evit an holl
Kensevenet gant al Leurenn Glenmor hag an SDAY

PU : 8 €
Sonadegoù war-sav

www.instagram.com/kendotemple

**SAMEDI 5
& DIMANCHE 6 DÉCEMBRE
SADORN 5 & SUL 6 A VIZ KERZU**

LES FEST'HIVERNALES AR FESTIVA'R GOAÑV

10H00-18H00 / 10E00-6E00
SALLE J. MARTRAY / SAL J. MARTRAY



Le rendez-vous nature, bio et solidaire du Poher, dans une ambiance chaleureuse et festive, qui valorise le vivre-ensemble, l'artisanat local et la préservation de notre environnement.

Au programme de ces deux jours : Grand salon biologique & artisanal, village associatif (animations ludiques et engagées), jeux d'antan pour petits et grands.

Samedi 5 décembre : culture, débats et musique. Interludes musicaux avec l'école de musique du Poher / Spézet et dégustation de vins bio en fin de matinée, une conférence dédiée à la préservation de la nature (en partenariat avec Hincob), suivie d'un ciné-débat captivant avec l'association Contrechamp, des contes avec la bibliothèque de Carhaix, suivis en fin de journée d'un grand concert au cœur du salon (danses bretonnes, chorale d'enfants et le bluegrass de Stella Might Come).

Dimanche 6 décembre : la journée des familles. Des animations scientifiques avec Les Petits Débrouillards et des déambulations magiques surprises, un spectacle vivant et une séance de cinéma spéciale jeune public en partenariat avec l'association Contrechamp, des dégustations de vins, et bien sûr la visite exclusive du Père Noël et de son lutin !

Restauration 100% bio sur place (Kig ha farz le samedi, crêpes le dimanche).

Organisation : Kuzul Skoazell Diwan Karaez

2 €

-10 ANS : GRATUIT

www.facebook.com/festhivernales

2 €

-10 VLOAZ : DIGOUST

Emgav ar Poc'hêr evit a sell ouzh an natur, ar bio hag ar genskoazell, en un aergelc'h tomm ha dudius, evit lakaat ar bevañ asambles, artizanerezh ar vro ha gwarez an endro war-wel.

Programm an daou zevezh : Saloñs biologel hag artizanel bras, kêriadenn ar c'hevredigezhioù (abadennoù evit c'hoari hag en em engouestlañ), c'hoarioù gwechall evit ar re yaouank koulz hag ar re gozh.

Sadorn 5 a viz Kerzu : sevenadur, kendivizoù ha sonerezh. Sonadegoù berr ur wech dre vare gant Skol sonerezh ar Poc'hêr / Speied hag un abadenn tañva gwin bio e fin ar mintinvezh, ur brezegenn war gwarez an natur (asambles gant Hincob) hag ur sine-kendiviz bamus da-heul gant ar gevredigezh Contrechamp, kontadennoù gant levraoueg Karaez, hag ur sonadeg vras da-heul e fin ar mintinvezh e-kreiz ar saloñs (dañsoù Breizh, laz-kanañ gant bugale ha sonerezh mod bluegrass gant Stella Might Come).

Sul 6 a viz Kerzu : devezh ar familhoù. Abadennoù skiantel gant Les Petits Débrouillards ha troioù-bale gant souezhadennoù ha troioù hud, un arvest bev hag un abadenn sinema evit ar re yaouank, gant ar gevredigezh Contrechamp, an abadenn tañva gwin, ha gwelet a raimp an Tad Nedeleg gant e gorrigan, sur eo neket marteze !

Boued 100% bio war al lec'h (Kig-ha-farz d'ar Sadorn, krampouezh d'ar Sul).

Aozet gant : Kuzul Skoazell Diwan Karaez

MARDI 8 DÉCEMBRE
MEURZH 8 A VIZ KERZU

MOGUIZ : COUCOU !

20H00 / 8E00
AMPHI / ANFI



© Benjamin Guillonnet

HUMOUR

Moguiz est devenu un véritable phénomène sur les réseaux sociaux grâce à sa galerie de personnages qu'il improvise et interprète avec une acuité aiguisée. Son sens inné de portraitiste d'hommes et de femmes de tous horizons (prof, secrétaire, comptable, parents, enfants...) lui a permis de créer un rendez-vous attendu chaque jour sur ses différents réseaux, par un public très diversifié.

Moguiz raconte une partie de son parcours et fait vivre ses personnages les plus emblématiques sur scène.

Un spectacle écrit par Moguiz et Thibault Segouin
Mise en scène : Thibault Segouin
Scénographie : Pierre Claude
Lumières : Gaël Cyma et Gauthier Segouin
Musique : François Villeveille
Perruques : Florian Tronco
Vidéo : Anne-Héloïse Dautel et Arthur Chassagne

Tout public
Organisation : Diogène Productions, en accord avec Ruq Spectacles

TU : 40 €
(Vente en ligne ou au guichet en espèces ou chèque)

<https://diogene.fr>

FENT

Deuet eo Moguiz da vezañ un orin a zen war ar rouedadoù sokial gant e steudad tudennoù a vez ijinet war ar prim ha c'hoariet gantañ gant e spered lemm. Barrek eo an tamm anezhañ evit sevel poltredoù paotred ha merc'hed e kement feson a vefe (kelennerien, sekretourezed, kontourien, tadoù pe mammoù, bugale...), ken e oar krouiñ un emgav hag a vez gortozet bemdez war e rouedadoù liesseurt, gant tud a bep seurt.

Kontañ a ra Moguiz ul lodenn eus e vuhez ha lakaat a ra e dudenoù arouezelañ da vevañ war al leurenn.

Un arvest skrivet gant Moguiz ha Thibault Segouin
Leurenniñ : Thibault Segouin
Leurennaozañ : Pierre Claude
Gouleier : Gaël Cyma ha Gauthier Segouin
Sonerezh : François Villeveille
Perukenoù : Florian Tronco
Video : Anne-Héloïse Dautel hag Arthur Chassagne

Evit an holl
Aozet gant Diogène Productions a ginnig asambles gant Ruq Spectacles

TU : 40 €
(Gwerzhañ enlinenn pe er stal en arc'hant pe dre chek)

JEUDI 10 & VENDREDI 11 DÉCEMBRE
YAOU 10 HA GWENER 11 A VIZ KERZU

BOOM BOOM KIDS

10H00 & 14H30 / 10E00 & 2E30
AMPHI / ANFI



CONCERT HUMORYTHMIQUE

Qui a dit qu'une démonstration de batterie devait être sérieuse ? Dans le sillage de leur spectacle phénomène « Incredible Drum Show » les Fils Monkey ont imaginé une version rien que pour les enfants, encore plus dynamique, ludique et accessible... Ce sera Boom Boom Kids ! Et c'est un autre duo de batteurs, aussi déjanté et bravache que l'original, qui reprend le rôle envié des « sales gosses » du fond de la classe.

Un voyage musical, drôle et poétique au cœur du rythme et de la percussion... interdit aux adultes !

Dès 3 ans
Durée : 55 min

SONADEG FENTUS HA NERZHUS

Dleet e vefe d'un abadenn diskouez gant taboulinoù bezañ sirius, emezit-hu ? Da-heul berzh o abadenn « Incredible Drum Show » ez eus bet ijinet un doare all anezhi gant ar Fils Monkey, savet a-ratozh-kaer evit ar vugale, dudius hag aes da gompren, ha c'hoariet gant muioc'h a startijenn c'hoazh... Boom Boom Kids an hini e vo ! En taol-mañ e vo c'hoariet ar roll pennañ, hini al « lakepoded » e foñs ar c'hlas, gant un daouad taboulinerien nevez.

Ur veaj sonerezh fentus ha barzhoniell dre greiz al luskoù hag an toserzh... hag a zo difennet ouzh ar re vras !

Adalek 3 bloaz
Pad : 55 min

ABADENNOÙ EVIT AR SKOLIDI
Goulenn gant ar sekretouriezh.

SAMEDI 12 DÉCEMBRE
SADORN 12 A VIZ KERZU

CRACK UP SHOW CIE./KZH DEUX A LA TÂCHE

16H00 / 4E00
AMPHI / ANFI



HUMOUR ET MAGIE

Un spectacle dynamique et puissant, étonnant et hilarant où le public ne peut que rire et s'amuser. Comédie physique, magie de haut niveau, humour, clown et deux personnages dangereusement différents. Un magicien suffisant et égocentrique, son assistante maladroite et rebelle et une relation compliquée sur scène, aboutissant aux situations les plus absurdes, plus de 100 gags et une fin puissante, inattendue et excitante.

Un mélange explosif, capable de faire rire, de divertir un public de tout âge.

Tout public
Durée : 50 min

HUD HA FENT

Neb a ya da welet an abadenn-mañ ne c'hall nemet c'hoarzhin hag ebatel : un arvest kreñv ha birvidik eo, souezhus ha farsus-bras, ur gomedien dre ar c'horfoù, gant troioù-hud eus ar c'hentañ troc'h ha fent, furlukinerzh, ha div dudenn disheñvel betek re. Un hudour brasonius hag otus, ur skoazellerez dizampart ha disentus, hag etreze un darempred diaes war al leurenn : diwar gement-se e c'hoarvez traoù droch-mat, gant ouzhpenn 100 fars hag un dibenn kreñv ha dic'hortoz hag a laka ar galon da dridal.

Ur meskaj hag a zifrink, gouest da zidual ha da lakaat an holl, kozh ha yaouank, da c'hoarzhin.

Evit an holl
Pad : 50 min

PU : 9 €

www.deuxalatache.com

SÉANCES SCOLAIRES
Se renseigner auprès de
notre secrétariat

TU : 9 €

DIMANCHE 13 DÉCEMBRE
SUL 13 A VIZ KERZU

**« LA PRESSE EST
UNANIME » DE LAURENT
RUQUIER**

**« A-UNVOUEZH EMAÑ
AR C'HAZETENNOÙ »**

JULIE ARNOLD, STEEVY BOULAY,
DANIEL-JEAN COLLOREDO,
DOMINIQUE MEROT,
WILFRIED GONON, ANNY VOGEL

17H00 / 5E00
AMPHI / AÑFI



THÉÂTRE

Stéphanie Grumet, actrice adulée mais disparue des écrans depuis plusieurs années, fait son grand retour au cinéma. Mais dans le petit monde des critiques et des attachés de presse, un simple article peut faire ou défaire une carrière... Et quand la presse s'en mêle, les vérités éclatent, les jalousies explosent et les amitiés se révèlent.

Entre vanités, coups bas et fous rires, Laurent Ruquier signe une comédie pétillante qui dresse un portrait mordant du milieu médiatique et de ses excès. Montée en 2002 au Théâtre des Variétés, « La presse est unanime » est la première pièce de Laurent RUQUIER. Elle a rencontré un vif succès pendant plusieurs mois. Steevy BOULAY reprend son rôle 23 ans après dans cette nouvelle configuration !

Un tourbillon d'humour et de quiproquos qui vous fera voir la critique d'un autre œil !

Une pièce de Laurent Ruquier
Mise en scène : Anthony Marty
Décors et costumes : Nicolas Delas

Tout public
Durée : 1h20

PB : 20 € / PK : 28 €
PD : 30 € / PL : 33 €

www.monsieurtheatre.fr/lapresseestunanime

TE : 20 € / TA : 28 €
TR : 30 € / TP : 33 €

C'HOARIVA

Un aktorez azeulet eo Stéphanie Grumet, daoust ma n'he deus c'hoariet e film ebet abaoe meur a vloaz. Ha setu-hi distro er sinemaoù a-benn ar fin ! Met e bedig-bed ar varnerien filmoù hag ar brezourien gelaouiñ, ez eus trawalc'h gant ur pennad evit reiñ lañs d'ur gariereenn pe diskar he brud, seul vui p'en em emell ar c'hazetennoù eus an afer... Da neuze e vez lavaret e soñj, dispaket e avi ha diskouezet e vignoniaj gant meur a hini.

Savet eo bet ar gomeidienn virvidik-mañ gant Laurent Ruquier evit taolenniñ bed ar mediaoù hag e dechoù fall. Enni e kaver barradoù lorc'h, taolioù treitour ha c'hoarzhadegoù bras mesk-ha-mesk. Ar pezh-c'hoari kentañ skrivet gant Laurent Ruquier eo « A-unvouezh emañ ar c'hazetennoù ». E 2002 e oa bet leurennet en Théâtre des Variétés hag e-pad meur a viz e reas berzh bras. 23 bloaz goude e c'hoario Steevy Boulay ar memes roll adarre !

Goude bezañ bet hejet-dihejet gant kement a fent hag a giprokoioù e selloc'h ouzh ar vicher varner filmoù en un doare all, sur eo ha neket marteze !

Ur pezh-c'hoari gant Laurent Ruquier
Leurennañ : Anthony Marty
Kinkladurioù ha gwiskamantoù : Nicolas Delas

Evit an holl
Pad : 1e20

**DIMANCHE 17 JANVIER
SUL 17 A VIZ GENVER**

**TOUR DU MONDE
TRO AR BED
LYV'N'KO CABARET**

10H30 / 10E30
AMPHI / ANFI



CABARET

Embarquement immédiat pour un Tour du Monde à travers 17 pays et 25 tableaux hauts en couleurs. Chaque escale révèle une explosion de rythmes, de danses enflammées et de costumes éclatants, pour une immersion totale dans la diversité des cultures.

Une chanteuse à la voix de velours et au charisme envoûtant vous guidera tout au long de cette aventure scénique. Artistes, danseurs et musiciens unissent leurs talents pour offrir une matinée vibrante, festive et dépayssante.

Un spectacle généreux, lumineux et plein d'énergie, pensé pour faire voyager sans quitter son siège.

Durée : 1h30
Organisation : Ville de Carhaix

TU : 5 €
-12 ANS : GRATUIT
Billetterie en vente sur place uniquement

KABARED

Poent eo mont e bourzh evit ober Tro ar Bed dre 17 bro ha 25 taolenn kaer-iskis. Da-geñver pep ehan e vo diskouezet un darzhadenn luskoù, dañsoù dirollet ha gwiskamantoù flamm o livioù, hag a soubo ac'hanoc'h penn-da-benn e liesseurted ar sevenadurioù.

A-hed an avantur-se e vioc'h ambrouget gant ur ganerez he mouezh voulouz hag he c'harism hoalus. Arzourien, dañserien ha sonerien a lakay kevret o barregzhioù evit kinnig ur mintinvezh birvidik, festus ha digustum.

Un arvest brokus, skedus ha leun a startijenn eo, soñjet evit lakaat an den da veajiñ anez sevel diwar e gador. Gant 6 arzour : ur ganerez, peder dañserezed hag un dañser.

Pad : 1e30
Aozet gant : Ti-kêr Karaez

PU : 5 €
-12 VLOAZ : DIGOUST
Bilhedoù e gwerzh
war al lec'h hepken

lyvanko.fr

MARDI 26, MERCREDI 27
ET JEUDI 28 JANVIER
MEURZH 26, MERC'HER 27
HA YAOU 28 A VIZ GENVER

RENCONTRES BRETAGNE EN SCÈNE(S) EMGAVIOÙ BREIZH WAR AL LEURENN(OÙ)

ESPACE GLENMOR / LEURENN GLENMOR



www.bretagneenscenes.com

SAMEDI 30 JANVIER
SADORN 30 A VIZ GENVER

POHERMUZIK #16

14H00-21H00 / 2E00-9E00
ESPACE GLENMOR / LEURENN GLENMOR



PANORAMA DE LA CRÉATION ARTISTIQUE EN BRETAGNE

Les Rencontres Artistiques et Professionnelles Bretagne en scène(s) ont pour objectif de présenter un panorama, partiel mais révélateur, de l'extrême dynamisme de la création bretonne dans le domaine du spectacle vivant. Elles sont l'illustration de l'accompagnement quotidien de salles de spectacles membres du réseau Bretagne en Scène(s).

Les spectacles sont principalement destinés à être découverts par des programmeurs et programmatrices. Ils sont également accessibles aux scolaires et/ou au public, sur inscription préalable et dans la limite des places disponibles.

Retrouvez début janvier 2027, la programmation détaillée de ce rendez-vous sur le site : www.bretagneenscenes.com

Coréalisation Espace Glenmor, Fédération Bretagne En Scène(s)

PH : 5 € EL LEC'HIENN BREIZH
WAR AL LEURENN(OÙ)
DIGOUST EVIT AR
GOUMANANTERIEN HAG EVIT
SKOLIDI AR C'HORN-BRO

TU : 5 € SUR LE SITE DE
BRETAGNE EN SCÈNE(S)
GRATUIT POUR LES ABONNÉS ET
LES SCOLAIRES DU TERRITOIRE

UR SELL WAR AR GROUIDIGEZH ARZEL E BREIZH

An Emgavioù Arzel ha Micherel « Breizh war al Leurenn(où) » zo o fal teuler ur sell - danel hag arouezius koulskoude - ouzh ar startijenn vras a zo gant ar groudigezh e Breizh war dachenn an arvestoù bev. Gante e weler ar sikour a vez roet bemdez d'ar salioù-abadennoù a zo izili eus ar rouedad Breizh war al Leurenn(où).

An arvestoù a vez c'hoariet dreist-holl evit lakaat ar programmourien hag ar programmourezed d'ober anaoudegezh gante. Digor int d'ar skolidi ha da neb piv bennak, ret eo dezhe lakaat o anv a-raok, gant ma chomo plasoù.

E deroù miz Genver 2027 e vo embannet programm an emgavioù-se dre ar munud el lec'hienn www.bretagneenscenes.com

Kensevenet gant al Leurenn Glenmor, ar C'hevread Breizh war al Leurenn(où)

LA MUSIQUE DANS TOUS SES ÉTATS

Dans une ambiance conviviale et festive, les professeurs et élèves musiciens de l'école de musique du Póher, et une formation issue des studios de répétition du CLAJ se produiront sur différentes scènes de l'Espace Glenmor. Découvrez des répertoires variés allant des musiques classiques aux musiques amplifiées, en passant par les musiques traditionnelles...

Tout public

Partenariat Espace
Glenmor, École de
musique du Póher,
CLAJ.

AR SONEREZH A-HED HAG A-DREUZ

En un aergelc'h plijus ha festus e vo ar gelennerien hag ar skolidi sonerien e Skol sonerezh ar Poc'hêr, hag ur strollad hag a zeuy eus studioioù pleustriñ an SDAY, o seniñ war meur a leurenn el Leurenn Glenmor. Ober a reoc'h anaoudegezh gant tonioù liesseurt, eus ar sonerezh klasel d'ar sonerezh amplaet, anez ankouaat ar sonerezh hengounel...

Evit an holl.

Kenlabour gant al Leurenn Glenmor, Skol sonerezh ar Poc'hêr hag an SDAY.

GRATUIT

<http://musique.pohr.bzh>

DIGOUST

**DIMANCHE 7 FÉVRIER
SUL 7 A VIZ C'HWEVRER**

LAVINIA MANCUSI

17H00 / 5E00
AMPHI / ANFI



© Davide Maurillo

MUSIQUE POPULAIRE ITALIENNE

Parmi les voix les plus intenses de la nouvelle génération de la scène musicale transalpine, Lavinia Mancusi imprime sa forte personnalité dans l'interprétation des traditions populaires italiennes et dans ses échappées belles dans les musiques du monde.

Consacrée par de nombreux prix depuis 2019, cette jeune Romaine, chanteuse et multi-instrumentiste (guitare, violon, tambour sur cadre), enchaîne les collaborations prestigieuses avec Lucilla Galeazzi, Eugenio Bennato ou Daniele Sepe et signe un 3ème album « A cruda voz » empreint d'émotions. Mais c'est bien sur les planches, son terrain de jeu favori, qu'elle prend une dimension transcendante portée par une présence scénique magnétique, une énergie contagieuse et une expressivité spectaculaire.

Tout Public

Coréalisation : La Grande Boutique

TE : 8 € / TA : 10 €
TR : 13 € / TP : 15 €

www.facebook.com/mancusilavinia

PB : 8 € / PK : 10 €
PD : 13 € / PL : 15 €

SONEREZH POBL ITALIA

Lavinia Mancusi zo unan eus ar mouezhioù kreñvañ a zo en Italia hiziv an deiz e-mesk ar remziad kanerien nevez. Merket eo hec'h arz gant he fersonelezh kreñv pa vez o kanañ tonioù pobl hengounel eus Italia koulz ha pa'z a da gantren dre sonerezhioù all eus ar bed.

Meur a briz zo aet gant ar plac'h yaouank-se eus Roma abaoe 2019. Ouzhpenn kanañ eo gouest da seniñ meur a venveg : ar gitar, ar violon hag an daboulin war framm. Kenlabouret he deus gant arzourien brudet evel Lucilla Galeazzi, Eugenio Bennato ha Daniele Sepe. Leun a fromoù eo he zrivet albom « A cruda voz ». Met seniñ war-eeun eo a blij dezhi ar muiañ. Da neuze e kas an arvesterien kalz pelloc'h eget ar c'han gant he bezañ sebezus war al leurenn, he startijenn gontammus hag he barregezh ezteuler estlammus.

Kensevenet gant : Ar Stal Vras
Evit an holl

SAMEDI 13 FÉVRIER
SADORN 13 A VIZ C'HWEVRER

BÉRENGÈRE KRIEF : SEXE

20H30 / 8E30
AMPHI / ANFI



HUMOUR

Béregère Krief questionne avec humour notre consommation de la sexualité.

Dans une société en pleine « sex-récession », elle apporte un nouvel éclairage et un regard sensible sur la place du plaisir dans notre éducation qui prône souvent plus la prévention que l'extase.

« On dit toujours que ce sont ceux qui en parlent le plus qui pratiquent le moins. La bonne nouvelle, c'est qu'il vous suffira simplement d'écouter. Je vous propose qu'on partage une heure de sexe. Une heure de sexe, parfois c'est court, parfois c'est long. Ce qui est sûr, c'est qu'une heure ensemble, ce sera forcément bon. » Béregère Krief.

Un spectacle drôle, sensible et libérateur, porté par une écriture fine et un sens du récit qui font de Béregère Krief l'une des humoristes les plus singulières de sa génération.

Nommée au Molière de l'humour 2025

Mise en scène : Pamela Ravassard

Création lumière : Cyril Manetta

Texte de : Béregère Krief, Jessé Rémond Lacroix et Fanny Ruwet

Spectacle recommandé à partir de 16 ans

Durée : 1h20

TA: 30 € / TR: 33 €
TP: 35 €

FENT

Gant fent en em soñj Béregère Krief war ar mod ma vev(ezo)mp ar sekselezh,

tra ma'z a war-gil en hor c'hevredigezh en deiz hiziv. Degas a ra ur banne sklaerijenn nevez hag ur sell tener war ar plas roet d'ar blijadur en hon deskadurezh, abalamour ma vez kaoz alies-mat eus riskloù muioc'h eget eus oriadelloù.

« War a lavarer ez eo an dud a gaoze anezhi ar muiañ a c'hoari an nebeutañ. Keloù mat zo memes tra : trawalc'h e vo deoc'h selaou. Kinnig a ran deoc'h tremen un eurvezh seks asambles. Berr e vez un eurvezh seks a-wechoù, hir e vez gwechoù all. Un dra zo sur avat : plijus e vo tremen un eurvezh asambles, hep mar ebet. » Béregère Krief

Un disamm eo an arvest farsus ha tener-mañ, skrivet en un doare sotil ha gant ur skiant danevelliñ hag a ra da Béregère Krief bezañ unan eus ar fentigellourezed dibarañ eus he remziad.

Anvet e oa bet e Molière ar fent e 2025

Leurennañ : Pamela Ravassard

Krouiñ ar gouleier : Cyril Manetta

Testenn gant : Béregère Krief, Jessé Rémond Lacroix ha Fanny Ruwet

Un abadenn evit an dud adalek 16 vloaz
Pad : 1e20

www.berengerekrief.fr

PK: 30 € / PD: 33 €
TL: 35 €

VENDREDI 19 FÉVRIER
GWENER 19 A VIZ C'HWEVRER

**LA BELLE AU BOIS DORMANT
AR GOANTENN E KOAD AR C'HOUSK**
GRAND BALLET DE KIEV
LAZ-KOROLL MEUR KYIV

20H00 / 8€00
AMPHI / AÑFI



DANSE CLASSIQUE

